




KENVREURIEZ AR BREZONEG

M^{re} h^c

KATEROU KENVREURIEZ AR BREZONEG.

Eizved bloavez.

(45,46,47,48,49)

NIVERENN 46- TAOLENN.

Overennou evid ar Zent hag ar Zentezed.

- | | |
|--|-------|
| 1) Rummad ar Gwerhezed. | p.1 |
| 2) Rummad ar Zent hag ar Zentezed dre vraz | p.5 |
| 3) Al lennadennou evid ar Gwerhezed. | p.17 |
| 4) Ar Salmou | p.20 |
| 5) An Aviel. | p.22 |
| 6) Danvez da skeudenna prezegennoù an
amzer a vremañ: | p.23: |
| a) N'em ken nemed loened. | |
| b) Ar mell torret | |
| c) Mamm ! ne z'in ket mui d'an overenn. | |

*Evid kement tra a zell ouz "Kenvreuriezh ar Brezoneg (Koum. 25 lur)
her goulenn digand:*

*An Aotrou Job SEITE, Skol an Aod, 29249 GUISSENY
CCP. 1738-66 Rennes*

Kavoud a reoh azaleg bremañ:

- | | |
|---|-----------|
| 1°) Levr Overenn | 35 lur |
| 2°) Komz Doue en overenn. Levr T. | 30 lur |
| 3°) Komz Doue en overenn. Levr A, B, C. Pebhini | 20 lur. |
| 4°) Ar briedelez | 8 lur |
| 5°) An Nouenn. | 8 lur. |
| 6°) Cantiques bretons du Diocèse de Quimper et de Léon... | 35 lur |
| 7°) Kroaziou Keltieg (Bleun Brug) | 3 lur |
| 8°) Overennou evid an Anaon... | 8 lur |
| 9°) Overennou en enor d'ar Werhez | ... 8 lur |
| 10°) Sakramant ar Vadiziant | ... 8 lur |
| 11°) Enoc'h Arden | ... 8 lur |
- + MIZOU KAS.

*Troidigezioù aotreet da arnod evid an eskobti a-berz an Aotrou
F. BARBU, eskob Kemper ha Leon/*

KEMPER, d'an 19 a viz Mae 1977.

Visant FAVE.

THE UNIVERSITY OF CHICAGO

PHYSICS DEPARTMENT

5720 S. UNIVERSITY AVE.

CHICAGO, ILL. 60637

TO: THE PHYSICS DEPARTMENT

FROM: THE PHYSICS DEPARTMENT

SUBJECT: PHYSICS DEPARTMENT

RE: PHYSICS DEPARTMENT

DATE: PHYSICS DEPARTMENT

BY: PHYSICS DEPARTMENT

FOR: PHYSICS DEPARTMENT

THROUGH: PHYSICS DEPARTMENT

ON: PHYSICS DEPARTMENT

AT: PHYSICS DEPARTMENT

IN: PHYSICS DEPARTMENT

OF: PHYSICS DEPARTMENT

BY: PHYSICS DEPARTMENT

FOR: PHYSICS DEPARTMENT

THROUGH: PHYSICS DEPARTMENT

ON: PHYSICS DEPARTMENT

AT: PHYSICS DEPARTMENT

IN: PHYSICS DEPARTMENT

OF: PHYSICS DEPARTMENT

BY: PHYSICS DEPARTMENT

FOR: PHYSICS DEPARTMENT

THROUGH: PHYSICS DEPARTMENT

ON: PHYSICS DEPARTMENT

AT: PHYSICS DEPARTMENT

IN: PHYSICS DEPARTMENT

OF: PHYSICS DEPARTMENT

BY: PHYSICS DEPARTMENT

FOR: PHYSICS DEPARTMENT

THROUGH: PHYSICS DEPARTMENT

ON: PHYSICS DEPARTMENT

AT: PHYSICS DEPARTMENT

IN: PHYSICS DEPARTMENT

OF: PHYSICS DEPARTMENT

OVERENNOU EVID AR ZENT
HAG AR ZENTEZED.

IV-RUMMAD AR GWERHEZED.

28- "HIC EST VIRGO SAPIENS"

KAN D'AN DIGOR:

Karget a furnez hag a skiant
he-deus Santez A. dalhet he lamp war-elum
evid-mond en arbenn d'an Aotrou Krist.

PEDENN D'AN DIGOR:

Aotrou Doue, or Zalver, selaouit ouz or pedennou
Evel ma'z eus joa ganeom o lida gouel santez A.
Grit ma vim kentelieta gand ar skouer euz he buez.
Dre or Zalver Jezuz Krist....

WAR AR PROVOU:

Oh embann an traou kaer ho-peus greet
e Santez A. gwerhez,
e teuom d'ho pedi gand eur galon izel.
Evel m'eo plijet deoh he buez renet hervez an Aviel,
dre an overenn-mañ
Dre Jezuz Krist, or Zalver...

ANTIVONENN D'AR GOMUNION (Maze 25/6)

Setu ar Fried o tond,
It en arbenn d'an Aotrou Krist.

GOUDE AR GOMUNION:

Dre ar bevañs euz an neñv ho-peus roet deom, Aotrou,
on-eus renvezet on nerz,
Dond a reom c'hoaz d'ho pedi
Pa zougom en or horv pasio-n Jezuz
war skouer Santez A.
Grit ma ne glaskim beva nemed evidoh
Dre Jezuz Krist, or Zalver. Amen.

29- GAUDEAMUS ET EXULTEMUS.

En enor d'ar gwerhezed.

KAN D'AN DIGOR:

Bezom lacuer ha tridom gand ar joa
o lida gouel Santez A...
Rag Doue, mestr ar bed, e-neus he haret,
ha grêt anezi eur werhez santel ha leun a hloar.

PEDENN AN DIGOR:

Aotrou Doue, skuillet ho-peus war zantez A...
ho tonezonou euz an neñv;
roit deom ar hras da zispenn he roudou
er bed-mañ war hent ar vertuziou,
evid kaoud lod ganti, ni ivez, en eürusted peurbaduz.
Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
Doue bev ganeoh ha gand ar Spered Glan
a oll viskoaz da virviken. Amen.

pe:(evid diazevourez eun Iliz)

Aotrou Doue, Santez A... he-deus ho karet evel pried fidel;
plijet ganeoh e teufe da entana or halonou
euz ar garantez-se he-deus laket da leski
e kalonou ho kompagnunezed, evid enor an Iliz.
Dre or Zalver....

WAR AR PROVOU:

Aotrou Doue, grit ma teuio deom
ar frouez euz ar brovadenn a ginnigom deoh,
ma vim, diwar skouer santez A:
dieubet euz kement a zeu euz an douar
ha troet da veva gand muioh a nerz hervez ar Spered.
Dre Jezuz Krist or Zalver. Amen.

ANTIVONENN (Mz 25/4-6)

Pemp plah yaouank o-doa laket eoul en o lampou,
e kreiz an noz e oe klevet eur hopadenn:
"setu ar pried o tond ! it war arbenn ar Hrist, an Aotrou."

GOUDE AR KOMUNION:

Aotrou, on Doue,
p'on-eus resevet er zakramant, korv ha gwad ho Mab,
grit ma vim distroet diouz an traou ne badont ket,
ha ma hellim evel-se, diouz skouer Santez A...
kreski war an douar er garantez wirion evidoh
ha kaoud en neñv al levenez d'ho kweled evid atao.
Dre Jezuz Krist or Zalver. Amen !

30- VENI SPONSA KRISTI.

En enor d'ar gwerhezed,

III

KAN D'AN DIGOR:

Dre he buez gouestlet penn-da-benn da Zoue,
 he-deus, Santez A... meritet kleved lavared dezi:
 "deuit, pried an Aotrou Krist, da reseo ar gurunenn
 e-neus prepartet an Aotrou deoh evid atao."

PEDENN D'AN DIGOR:

Aotrou Doue, c'hwiz hag a fell deoh,
 ober ho temeuranñs er halonou eeun ha leal,
 grit deom dre bedennou Santez A...
 beva hervez ho kras,
 neuze e helloh dond ennom da ober ho temeuranñs

Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
 Doue bev ganeoh ha gand ar Spered Glan,
 a oll viskoaz da virviken. Amen.

pe:

Aotrou Doue, selaouit ni ho ped ouz or pedennou,
 en deiz ma reom memor ouz Santez A.
 roit deom ar hras da jom
 ha da greski bepred en ho karantez beteg fin or buez
 Dre or Zalver...

WAR AR PROVOU:

Digemerit, Aotrou Doue, an enor, dister anezanñ,
 a rentom deoh da houel Santez A... gwerhez;
 ha grit deom, dre ar zakrifis dinamm-mañ
 beza entanet a garantez dirazoh.

Dre Jezuz Krist or Zalver. Amen.

ANTIVONENN:(Diwar Lz. 10/42)

Santez A... aketuz ha doujuz,
 he-deus dibabet al lodern wella:
 ne vo ket dilammet diganti.

GOUDE AR GOMUNION:

Kemmerzet gand ar bara euz an neñv,
 e teuom da bedi ho madelez Aotrou.
 en deiz ma lidom gouel Santez A...
 roit deom ar pardon euz or pahejou,
 d'or horv ar yehed,
 ha d'on eneoù ar hras hag ar hloar peurbaduz.

Dre Jezuz Krist or Zalver. AMEN.

31- VIRGINES LAUDENT.En enor d'ar gwerhezad (meur a hini-)KAN D'AN DIGOR:

*Ra veulo ar gwerhezad ano an Aotrou,
an ano a zo dreist an oll anoioù,
a zo e vrazder dreist an neñv hag an douar.*

PEDENN AN DIGOR:

*Aotrou Doue, skuillit puill warnom ho trugarez
ha peogwir e lidom gant levezad
gouel ar zentezed A...hag A...
roit deom an eürusted da veza evid atao
gant ar re oll ho-peus roet digemer dezo en ho kichen
Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
Doue bev ganeoh ha gant ar Spered Glan
a oll viskoaz da virviken. Amen.*

WAR AR PROVOU:

*Aotrou Doue, o lida gouel ar zentezed A... hag A...
eh embannom ar haer a draou ho-peus grêt,
hag e kinnigom deoh or provadenn;
peogwir he-deus bet o buez priz braz dirazoh,
ra vo ken prisiuz all evidoh
an aked a lakom d'ho servicha ouz an aoter.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. Amen !*

ANTIVONENN (Mz 25/10-)

*Pa zigouezas ar pried, ar gwerhezad a oa prest
a yeas gantañ e sal an eured.*

pe: (Yn. 14/21-23)

*An hini a gar ahanon, a vo karet gant va Zad
eme an Aotrou
Dond a raim davetañ
hag on demeurants a raim ennañ.*

GOUDE AR GOMUNION:

*Ra zeuio, Aotrou Doue, ar gomunion-mañ en ho misteriou
gant gouel ar zentezed A...hag A...
da rei deom nerz ha d'on delher bepred war hed;
evelse o veza m'on-dezo gouezet gortoz donedigez ho Mab
e hellim beza digemeret ouz an daol eured en e rouantelez,
En Jezuz Krist or Zalver. Amen !*

V- RUMMAD AR ZENT HAG AR ZENTEZED DRE VRAZ.

32-.. "CONFITEOR TIBI"...

En enor d'ar zent ha d'ar zentezed. (I)

KAN D'AN DIGOR: (Salm 144/10-21)

*C'hwi 'vo meulet; Aotrou, gand oll ho krouadurien
hag ho tud fidel ho pennigo !
Displega 'raint gloar ha rouantelez
skigna 'raint brud ho kalloud.*

PEDENN AN DIGOR:

*Aotrou Doue oll-halloudeg ha peurbadel
o rei d'ar zent lod en ho kloar en neñvou
e roit deom merkou nevez euz ho karantez;
Plijet ganeoh e teufe ar zikour euz o fedennou
hag an nerz diwar skouer o buez
d'or zikour da gerzed war roudou ho Mab
En on Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan
a oll viskoaz da virviken. Amen.*

WAR AR PROVOU:

*Selaout gand madelez ouz or pedennou, Aotrou,
hag evid ma vim din d'ho servicha ouz hoh aoter,
Diwallit ahanom dre sikour ar zent.
Dre Jezuz Krist or Zalver. Amen.*

ANTIVONENN (Salm 67/4)

*Ouz taol an Aotrou ez eo laouen an dud just,
Dirag Doue e tridont gand al levenez.*

pe (Luk. 12/37)

*Eüruz ar zervicherien a gavo ar mestr anezo
war veill pa zistroio .
E gwirionez, m'henn lavar deoh
starda a ray e houriz
ober a raio dezo azeza ouz taol
hag o zervicha a ray an eil goude egile.*

GOUDE AR GOMUNION:

*Doue oll-halloudeg ha peurbadel,
ahanoh e teu ar frealzidigez hag ar peoh;
plijet ganeoh rei d'ho servicherien bodet evid meuli hoh ano
gand gouel ho sent
da gavoud, er gomunion euz korv ha gwad ho Mab
an arrez euz ar zilvidigez peurbaduz.
Dre Jezuz Krist or Zalver. Amen !*

*1-Ar c'hweh kenta(32-37) a hell beza implijet evid n'eus forz peseurt sant
pe santez, ar c'hweh all(38-43) evid ar rummadou merket,*

33-.... LAETABITUR JUSTUS...

En-enor d'ar zent ha d'ar-zentezed.

KAN D'AN DIGOR:(Salm 63/11)

An Aotrou, an den just a gavo ennañ
e repu hag e levenez.
An dud eeun a galon a gavo ennañ o lorch.

PEDENN AN DIGOR:

Aotrou Doue, c'hwiri hebken a zo santel
hag heb ho sikour, n'eus den hag a ve mad.
Roit deom ar hras ouz pedenn Sant A...
da zelaou ho mouez, ha da gaoud lod en ho kload.

Dre Jezuz Krist ho Mab hag on Aotrou,
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken. Amen !

WAR AR PROVOU:

Doue oll-halloudeg, ni a zeu d'ho pedi:
grit ma vo plijuz deoh ar zakrifis-mañ,
kinniget en enor d'ar zent;
ha ma roio deom yehed ar hore hag an ene.

Dre Jezuz Krist or Zalver/... Amen !

ANTIVONENN(Yn.12/26)

An neb a zo servicher din,
ra zeuio d'am heul,
hag el leh ma vin-me e vo ivez va servicher.

GOUDE AR GOMUNION:

Da geñver gouel Sant A... e teuom d'ho pedi Aotrou,
bremañ, pa'z om kennerzet gand ar gomunion,
grit deom kaoud perz da viken,
er madou a zeu deom hirio dre ho kras.

Dre Jezuz Krist or Zalver. Amen !

LOUIS DE LA ROCHE

34-/...."IN VIRTUTE TUA"....

En enor d'ar zent ha d'ar zentezad. (III)

KAN D'AN DIGOR: (Salm 20/2-3)

Aotrou, o weled ho kalloud e teu d'an den just levenez.
N'az-peus ket greet skouarn vouzar ouz e houlennoù
roet ho-peus dezañ kement a hoantae e galon.

PEDENN D'AN DIGOR:

Da zigeri d'ar zempl ma'z om, hent ar zilvidigez,
e roit deom Aotrou sikour ha skouer ar zent;
p'emaom o lida gouel sant A... eet en e hloar
grit deom mond davedoh en eur gemer skouer diwarnañ
Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken. Amen !

WAR AR PROVOU:

Dre ar brovadenn a ginnigom deoh,
da houel Sant A...
plijet ganeoh rei d'ho servicherien
ar grasou a unaniez hag a beoh
Dre Jezuz Krist or Zalver. Amen !

ANTIVONENN(Mz.16/24)

An neb a fell dezañ dond war va lerh
a dle trei kein dezañ e-unan,
kemer e groaz ha dond d'am heul.

GOUDE AR GOMUNION:

Aotrou, on Doue, ni a zeu d'ho pedi:
ra zeuio ar gomunion on-eus resevet da houel Sant A...
da zantellaad or sperejou hag or halonou,
ha da rei deom lod e natur Doue.
Dre Jezuz Krist or Zalver. Amen !

35- "LEX VERITATIS"

En enor d'ar zent ha d'ar zentezed.

KAN D'AN DIGOR: (Diwar MalaK. 2/6)

*Sant A... a oa lezenn ar wirionez war e vuzellou
droug ebed ne oa warno.*

*Er peoh hag en onestiz e kerze gand an Aotrou,
kalz tud e-neus distroet diouz an droug.*

PEDENN AN DIGOR:

*Her gweled a rit, Aotrou:
Tud gwan a zo ahanom ha n'hellom ket herzel,
grit, ni ho ped, ma tevio skouer ar zent,
da entana ennom ar garantez evidoh.*

*Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken. Amen !*

WAR AR PROVOU:

*An overenn-mañ, lidet en enor da Zant A...
grit ma tigasao deom ar zilvidigez
ha ma plijo deoh.*

Dre Jezuz Krist or Zalver. AMEN!

ANTIVONENN(Mz 5/8-9)

*Eüruz ar re a zo glan a galon, rag int a welo Doue.
Eüruz ar re a labour evid ar peoh, arwet a vezint bugale Doue.
Eüruz ar re o-deus da houzañv ablamour da zervij Doue
rag dezo eo rouantelez an neñvou.*

GouDE AR GOMUNION:

*Goude beza kemeret perz en ho misteriou sakr, Aotrou,
ni 'zoud'ho pedi,
grit ma vo santelloh or buez,
goude beza lidet an overenn -mañ.*

Dre Jezuz Krist Or Zalver. Amen !

36-... "JUSTUS UT PALMA"En enor d'ar zent ha d'ar zentezed.KAN D'AN DIGOR: (Salm 91/13-14)

An den just, par d'ar gwez palmez a vleunio,
 'vel gwez sedr Menez-Liban, e kresko;
 E ti an Aotrou, p'o-do greet guriziu
 e leuriou ti Doue, e taolint o bleun.

PEDENN AN DIGOR:

Ra zeuio pedennou ar zent, Aotrou,
 da obten deom siñour euz ho perz;
 peogwir e lidom o gouel gand karantez
 grit deom kaoud lod en o eürusted peurbaduz.

Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
 Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
 a oll viskoaz da virviken. Amen !

WAR AR PROVOU:

Ni hag a zigas ar brovadenn-mañ war hoh aoter, Aotrou,
 Plijet ganeoh rei deom ar garantez tener-se,
 ho-peus laket e kalon Sant A...
 Grit deom tostaad ouz ar mister zakr-mañ,
 gand eun ene glan hag eur galon virvidig,
 evid kinnig deoh eur zakrifis
 plijuz deoh ha talvouduz evidom.

Dre Jezuz Krist or Zalver. Amen !

ANTIVONENN (Mz. 11/18)

Deuit davedon, c'hwil oll a zo skuiz,
 hag a bleg dindan ar zamm
 ha me a roio deoh an diskuiz...

GOUDE AR GOMUNION:

Ar perz on-eus kemeret en overenn-mañ,
 ra zeuio da rei deom ar zilvidigez
 ha da greski ennom sklerijenn ar wirionez.

Dre Jezuz Krist, or Zalver. Amen !

37- "BENEDICTUS VIR"En enor d'ar zent ha d'ar zentezed. (VI)KAN D'AN DIGOR: (Jer. 17/7-8)

Bennoz war an den a laka e fiziañs en Aotrou Doue,
 a zo an Aotrou e esperañs;
 Heñvel eo ouz eur wazenn plantet war ribl an dour,
 astennet e gwrizioù beteg an dour-red,
 ha ne ehan ket da zougenñ frouez.

PEDENN AN DIGOR:

Aotrou Doue oll-halloudeg,
 plijet ganeoh e teufe skouer ar zent,
 d'or poulza d'eur vuez santelloh;
 ha p'emaom o lida gouel Sant A...
 roit deom ar hras da gerzed war e roudou
 gand nerz kalon.

Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
 Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
 a oll viskoaz da virviken. Amen !

WAR AR PROVOU:

Aotrou Doue oll-halloudeg,
 d'an deiz ma lidom gouel Sant A.
 e teuom d'ho pedi ha da ginnig deoh ar provadenn
 war hoh aoter.
 Grit ma teuo diwarno deoh ar vrasa gloar,
 ha deom-ni ar frouezusa grasou.

Dre Jezuz Krist or Zalver. Amen!

ANTIVONENN (Yn. 15/1)

Evel m'e-neus va zad karet ahanon,
 me ivez am-eus ho karet, chomit em harantez.!

GOUDE AR GOMUNION:

Ni a zeu d'ho pedi, Aotrou Doue;
 ar zakramant on-eus kemeret perz ennañ
 en deiz ma lidom gouel Sant A...
 grit ma vo evidom eun eienenn a beoh hag a zilvidigez.

Dre Jezuz Krist or Zalver. Amen !

38-... "DOMINUS PARS" ...En enor d'al-leaned, (I)KAN D'AN DIGOR: (Salm 15/5)

Ar re a zo o halon da Zoue a gan:
 "C'hwi eo va lod ha va halirad,
 etre ho taouarn ema va flanedenn."

PEDENN AN DIGOR:

Roet ho-peus, Aotrou Doue, da Zant A...
 ar hras da gerzed war roudou an Aotrou Krist,
 paour hag izel a galon;
 grit deom dre nerz e bedennou
 mond gand an hent merket deom ha tizoud ar zantelez
 ho-peus roet deom ar skouer anezi e Jezuz Krist ho Mab,
 En, on Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
 a oll viskoaz da virviken. Amen !

pe:(evid eun abad):

Plijet ganeoh rei deom, Aotrou,
 e kreiz trubuilhou ar bed-mañ,
 eur garantez birvidig evid traou an neñv,
 c'hwi hag ho-peus roet deom gand an abad-santel-A...
 eur skouer a zantelez hervez an Aviel.

Dre or Zalver Jezuz Krist. ho Mab hag on Aotrou,
 Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
 a oll viskoaz da virviken Amen !

WAR AR PROVOU:

Aotrou Doue, mad dreist peb madelez,
 e Sant A... ho-peus distrujet an den a behed,
 evid kroui eun den renevezet diouz ar skeudenn ahanoh;
 roit deom ar hras da veza renevezet evelañ,
 evid ma hellfem plijoud deoh,
 en eur ginnig ar zakrifis-mañ a beoh hag a bardon.

Dre or Zalver Jezuz Krist. Amen !

ANTIVONENN D'AR GOMUNION: (Diwar Mz. 19/27-29)

E-gwirionez m'henn lavar deoh:
 c'hwi hag ho-peus dilezet pebtra hag a zo deuet d'am heul,
 c'hwi a resevo kant evid unan,
 hag ho-po en heritaj ar vuez peurbaduz.

GOUDE AR GOMUNION:

Kennerzet bremañ gand ar gomunion on-eus resevet
 e teuom c'hoaz d'ho pedi Aotrou Doue;
 grit ma hellfem diwar skouer Sant A...
 chom heb klask netra nemedoh,
 ha beva er bed-mañ evel tud renevezet,
 Dre Jezuz Krist or Zalver. Amen !

39- " ISTI SUNT SANCTI"En enor da leaned. (II)KAN D'AN DIGOR: (diwar salm 23/5-6)

*Sant A. e-neus resevet bennoz an Aotrou Doue,
trugarez e-neus kavet a-berz Doue e zalver,
rag bez 'e oa euz gouern an dud a glask Doue.*

PEDENN D'AN DIGOR:

*Aotrou Doue, c'hwi hag ho-peus galvet Sant A...
da glask gounid ho karantez er bed-mañ;
o ren euz vuez a garantez;
Plijet ganeoh e-nefemm, sikouret gand e bedennoù,
ar joa da weled or karantez o vond war gresk bepred,
Dre or Zalver Jezuz Krist, ho mab hag on Aotrou,
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken. AMEN.*

WAR AR PROVOU:

*Plijet ganeoh, Aotrou Doue, ober digemer vad
d'ar provou a ginnig deoh ho servicherien, war an aoter,
da geñver gouel Sant A...
Grit ma teum da drei kein da vadou an douar
ha chom heb kaoud pinvidigez all ebed nemedoh.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.*

ANTIVONENN D'AR GOMUNION:

*Grit eun tañva ha komprenit pegen mad eo an Aotrou
Eñruz an den a laka e fiziañs ennañ.*

GOUDE AR GOMUNION:

*Dre halloud ar zakramant-mañ, ni ho ped Aotrou,
deuit d'or ren bepred war hent ho karantez,
evel m'ho-peus grêt evid Sant A...
Al labour a zilvidigez ho-peus komanset ennom,
kasit anezañ da benn beteg deiz ar Hrist Jezuz.
Eñ hag a zo Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken. AMEN.*

40- " VENITE BENEDICTI "En enor d'ar zent gouestlet d'an obereu a drugarez.KAN D'AN DIGOR: ' (Maze 25/ 34,36,40)

D'ar re o-deus e zervichet en o breudeur, e lavaro an Aotrou
 -"Deuit tud benniget gand va zad,
 Klav e oan hag ez oh deuet d'am gweled...
 E gwirionez, m'hen lavar deoh:
 bewech m'ho-peus greet kement all d'an disterra
 euz va breudeur, din-me va unan eo ho-peus hen grêt."

PEDENN D'AN DIGOR:

Hervez ho kelennadurez Aotrou,
 ho kared ha kared an nesa
 a zo mired oll ho kourhemennou;
 Grit deom lakaad bepred karantez en or buez
 diouz skouer Sant A...
 evid beza evelse lakeet e renk ar re venniget euz ho rouantelez
 Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou, Doue beo ganeoh
 ha gand ar Spered Glan, a oll viskoaz da virviken. AMEN.

WAR AR PROVOU:

Grit digemer vad, Aotrou Doue, da brovadenn ho pobl,
 ni hag a ra memor euz karantez divuzul ho mab;
 Grit deom war skouer ar zent,
 startaad er garantez evidoh hag evid amesa.
 Dre Jezuz Krist or Zalver. AMEN.

ANTIVONENN D'AR GOMUNION:

N'eus ket brasoh karantez,
 eged rei ar vuez evid ar re a garer.

pe: Diouz kement-mañ e ouezo an oll ez oh diskibien din:
 m'ho-peus karantez an eil evid egile.

GOUDE AR GOMUNION:

C'hwit ho-peus or kennerzet, Aotrou, dre ar gomunion,
 deuit bremañ d'or sikour da heulia skouer sant A...
 er garantez e-neus maget evidoh,
 hag en drugarez e-neus diskouezet evid ho pobl
 Dre Jezuz Krist or Zalver. AMEN.

pe: Maget bremañ ha karget a levenez gand sakramant ar zilvidigez
 e teuom Aotrou, da bedi ho madelez;
 grit ma teum en eur heulia trugarez Sant A...
 da gaoud perz eun deiz en e hloar.
 Dre Jezuz Krist or Zalver. AMEN.

41- " SINITE PARVULOS"En enor d'ar gelennerien.KAN D'AN DIGOR: (Mark, 10/14)

Lezit ar vugaligou da zond beteg ennon,
 ha na virit ket outo,
 rag d'ar re a denn dezo eo Rouantelez Doue.

pe:... An neb a heuill ar gourhemennou
 hag a zoug ar re all d'o heulia
 hennez a vo lakeet uhel e rouantelez an neñv.
 eme or Zalver.

PEDENN D'AN DIGOR:

Aotrou Doue, c'hwi hag ho-peus lakeet da zevel en hoh Iliz
 Sant A... evid diskouez d'ar re all hent ar zilvidigez
 roit deom ar hraz da gerzoud eveldañ
 war roudou ar Hrist ho Mab,
 ha da vond evelse davedoh e kompagnunez or breudeur

Dre or Zalver Jezuz Krist ho Mab hag on Aotrou,
 Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
 a oll viskoaz da virviken. AMEN.

ANTIVONENN D'AR GOMUNION: (Maze, 18/3)

Ma ne jenchit ket evid dond da veza heñvel ouz bugaligou
 ne antreoh ket e rouantelez an neñv, eme an Aotrou.

pe: (Yann, 8/12)
 Me eo sklerijenn ar bed, eme an Aotrou,
 an neb a zeu d'am heul ne gerzo ket en deñvalijenn,
 bez'e-no sklerijenn ar vuez.

GOUDE AR GOMUNION:

Aotrou Doue oll halloudeg
 grit deom kaoud skoazell er pred sakr-manñ
 evid ma hellim diwar skouer ar zent,
 rei testeni dre or halon ha dre or buez
 euz or harantez e keñver an nesa
 hag euz sklerijenn ar wirionez.

Dre Jezuz Krist or Zalver. AMEN.

42- "MULIER TIMENS"En enor da verhed santel.KAN AN DIGOR: (diwar al Lavarou, 31/30, 28)

Ar vaouez doujuz da Zoue
 honnez a zo da veza meulet
 he bugale a embanno ez eo eilruz meurbed,
 he fried a ray he meuleudi.

PEDENN D'AN DIGOR:

Aotrou Doue, c'hwi a ro deom laouenedigez,
 da geñver gouel deiz a bloaz Santez A...
 Pa rentom enor dezin, en or pedennou,
 roit deom ar hras da zispenn he roudou, dre zantelez or buez.
 Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
 Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
 a oll viskoaz da virviken. AMEN.

pe: Ni ho ped, Doue oll halloudeg,
 ra zeuio pedennou ar zentezed A...ha A...
 da obten deom ar hras da zispenn o roudou
 e kement a gavom a gaer en o buez,
 peogwir e hell o zantelez beza eur skouer
 evid peb hini ahanom. Dre Jezuz Krist.....

WAR AR PROVOU:

O kinnig deoh, Aotrou Doue, ar zakrifis-mañ
 evid lida gouel Santez A...
 e kasom beteg ennoh or pedenn,
 Grit ma teuio deom diwar ar zakrifis-se
 pardon ha silvidigez.
 Dre Jezuz Krist or Zalver. AMEN.

ANTIVONENN AR GOMUNION (Maze. 13/45-46)

Heñvel eo c'hoaz rouantelez an neñvou
 ouz eur morhadour o klask perlez kaer;
 Kavet gantañ eur berlezenn, braz he zalvoudegez
 ez a da werza kement e-neus hag e pren anezi.

GOUDE AR GOMUNION:

Aotrou Doue oll halloudeg, gand gouel Santez A...
 grit ma teuio deom diwar an overenn-mañ
 sklerijenn ha karantez virvidig
 ha ra dremenim or buez oh ober ar mad;
 Dre Jezuz Krist or Zalver. AMEN.

43- " ECCE MULIER SAPIENS"En enor da verhed santel.KAN AN DIGOR (diwar al Lav. 14/ 1-2)

Santez A... a oe eur vaouez leun a furnez
 a ouezas sevel ervad he ziegez,
 ha kerzed gand an hent eeun, doujuz d'an Aotrou.

PEDENN AN DIGOR:

Aotrou Doue, c'hwi hag a uhella an dud dister,
 c'hwi hag ho-peus grêt euz santez A...
 eur zantez dispar a garantez hag a nerz kalon,
 roit deom ar hras dre he fedennou hag he meritou
 d'ho kared bepred en eur zougenn or hroaz.

Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
 Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
 a oll viskoaz da virviken. AMEN.

pe:

Skuillit warnom, Aotrou Doue,
 an donezon d'ho anaoud ha d'ho kared
 evel m'ho-peus roet en eun doare dispar d'ho servicherez A...
 deom-ni neuze, en eur boania d'ho servicha,
 evel m'he-deus-hi grêt, da blijoud deoh dre or feiz hag or buez
 Dre or Zalver....

WAR AR PROVOU:

Faolit eur zell, Aotrou, war ar zakrifis
 a ginnig deoh ho pobl gand eur galon entanet
 en enor da Zantez A...
 ma teuo dezati diwar ar zakrifis-se grasou a zilvidigez.
 Dre Jezuz Krist or Zalver. AMEN.

ANTIVONENN AR GOMUNION(Maze 12/50)

An neb piou bennag a ra bolontez va zad a zo en neñvou
 hennez a zo breur, c'hoar ha mamm din.

GOUDE AR GOMUNION:

Aotrou Doue, torret eo bet deom or c'hoant
 gand an donezonou on-eus resevet diganeoh
 da getver gouel Santez A...
 grit ma teuint d'or gwalhi, d'or sikour
 ha d'or gwarezi.

Dre Jezuz Krist or Zalver. AMEN.

IV-... RUMMAD AR GWERHEZED.

AL LENNADENNOU.LENNADENN GENTA(ER MEZ EUZ AN AMZER FASK)KANENN...8/6-7:

Ar garantez a zo kreñv evel ar maro. Amañ e kavom kanenn
ar garantez displeget gand bugale da Zoue.

Lennadenn euz kanenn ar Hanernnou:

6-Va miia karet,
ra vo garanet va ano en da galon,
ra vo merket war va vreh.
Rag kreñv eo ar garantez evel ar maro,
heb distro eo ar youl evel an islong,
e flammou a zo flammou hag a zev,
bez'ez eo eun tan-Doue.

7-Ar froudou n'int ket evid moug ar garantez
nag ar stêriou braz evid e zamma.

SALM 48...Gweled pelloh...

OZEA...2/16b,17b,21-22:

Te a vo an hini am-eus dābabet,hag a vo evid atao.

Lennadenn euz ar Profed OZEA:16b-Setu komzou an Aotrou:

-Va gwreg eet disleal em herver,
ez an da zeseo anezi.
He zacha a rin ganin beteg ar goueteh(dezert)
hag e komzin outi kalon-ha-kalon.

17b-Eno e responto din evel en amzer he yaouankiz,
d'an deiz ma oa deuet er mēz euz bro Ejipt.

21-Te a vo an hini a zimezin ganti

hag a vo evid atao.

Te a vo an hini a zimezin ganti,
dit e roin peb justis ha peb gwir,
gand eur garantez tener.

Te a vo an hini a zimezin ganti,
hag e vezi feal din,
hag e ouezi piou eo an Aotrou.

LENNADENN GENTA (EPAD AN AMZER FASK)

1...Diskul...19/1,5-9a.

Ar Hrist eo an Oan,
hag an denelez e bried.

Lennadenn euz levr an Diskuliadur:

1 Me, Tann,

a glevas en neñ evel trouz braz eur mor a dud o lavaroud:
Alleluia ! D'an Doue ar zilvidigez, ar hloaz, ar galloud

5 Euz an tron e savas eur vouez hag a lavare:

"Kanit meuleudi d'on Doue, c'hwi oll e zervicherien
Hag ar re o-deus doujañs evitañ, ar re vian hag ar re vras."

6 Neuze, e klevis evel eur mor a dud,
evel trouz ar moriou,
evel kroadenn talmou kurun o strakal a-forz

Lavared a reint: Alleluia !

Rag an Aotrou, on Doue oll halloudeg
e-neus diskouezet ez eo Roue.

7 Bezom laouen ha tridom, rentom gloar dezañ,
rag setu deuet eured an Oan,
e bried he-deus en-em fichet.

8 Roet eo bet dezi en-em wiska gand lin fin, glan ha skeduz.
al lin fin eo santelez ar Zent.

9 Hag e lavaras din an el:

"Skriv kement-mañ,
Eüruz ar re a zo pedet da goan-eured an Oan."

SALM 148...Gweled pelloh...

EIL LENNADENN:

1 I Kor. 7/25-35:

Petra 'lavar Sant Paol
diwarbenn stad an dud dizemeg
ha stad an dud dimezet;

Lennadenn euz lizher kenta Bant Paol da gristenien Korint:

25 Va breudeur

evid ar pezh a zell ouz ar gwerhezeg,
n'am-eus gourhemenn ebed a-berz Doue,
eun ali eo a roan
ali, diñ da veza kredet . Ire drugarez an Aotrou.

26 D'an zoñj eo mad ar stad-se
 en abeg d'an diesteriou a vremañ,
 ya soñjal a ran en mad d'an den chom evelse.

27 Mar dout unanet gant eur vaouez,
 Na glask ket terri.
 Ma n'out ket unanet gant eur vaouez,
 Na glask ket dimezi.

28 Koulskoude, ma teu dit dimezi,
 ne rez pehed ebed.
 hag eur werh, ma teu dezi dimezi
 ne ra pehed ebed.
 med an dud dimezet
 o dezo poaniou braz da houzañ,
 ha me 'garfe o tiwall diouto.

29 Lavared a ran deoh: berr eo an amzer.
 ahanta! neuze, d'ar re o-deus gwreg, beza evel ma n'o
 defe ket

30 D'ar re a ouel, evel ma ne ouelfent ket,
 d'ar re a zo eüruz evel ma ne vefent ket,
 d'ar re a bren, evel ma n'o-defe netra dezo.

31 D'ar re a denn gounidegez euz ar bed
 evel ma ne rafent ket.

Rag ar bed evel m'her gwelom a zo o vond da get.

32 Va c'hoant a zo e vefeh kuit a beb trubuilh
 an den n'eo ket dimezet, e-neus soursi
 gant aferiou Doue
 ha klask a ra an ta da blijoud d'an Aotrou.

33 Med an hini a zo dimezet en-eus soursi gant aferiou ar bed
 ha klask a ra an tu da blijoud d'e wreg

34 Ha setu eñ etre an daou.
 Evelse ivez ar vaouez dizez hag ar plah yaouank
 o-deus soursi gant aferiou an Aotrou,
 evid beza santel a gorv hag a spered.

Med ar vaouez dimezet he-deus soursi gant aferiou ar bed,
 Klask a ra plijoud d'e gwaz.

35 Evid ho mad eo e lavaran kement-se,
 ne glaskan ket stigma peñhou deoh.
 Med evid ma rafek ar pezh a zere ar gwella,
 ha ma vefek unanet gant an Aotrou,
 Ha gantañ hebken.

2...II Kor...10/17-11/2:

D'an den a gemer lorch gantañ e unan, lakaad e lorch en Aotrou.

Lennadenn euz eil lizer Sant Paol da gristenien Korint:

10/17 Va breudeur

D'an neb a gemer lorch gantañ e-unan
lakaad e lorch en Aotrou.

18 N'eo ket an hini en em veul e unan
e-neus roet testeni euz e dalvoudegez,
med an hini a zo meulet gand an Aotrou.

11/1 Ah, ma hellfeh gouzañv euz va ferz eun tammig follentez !
Ya gouzañvit ahanon !

2 Gwarizi am-eus en ho keñver,
kement ha m'en-deus Doue,
Ho timezet am-eus d'eur pried unan hebken anezañ
evid ho kinnig d'an Aotrou Krist evel eur werhez hlan."

6- SALMOU.SALM 44/ 11,12,14,16:

Diskan: En he haerza, setu o tond,
'barz ar palez, merh ar roue;
gwisket ganti dillad neud aour
he flahed enor 'zo d'he heul.

(a hell beza kanet war don ar chapeled a hloar.Kantikou N°70)

11-Sellit merh, ha sellit mad
ha lakit digor ho tiskouarn
en eur vond kuit lezit ar zontj
euz tud ho pobl ha ti ho tad !

12-C'hoant 'neus ahanoh ar Roue
rag ho kened a blij dezañ;
bremañpâ'z eo an Aotrou deoh
it 'ta da stoui dirazañ.

13-En he haerra setu o tond,
'barz ar palez merh ar Roue
gwisket ganti dillad neud aour
he flahed enor 'zo d'he heul.

14-Kaset eo tre e-barz an ti,
e kreiz ar joa, ar veuleudi,
hi 'vo rouanez da viken,
e palez kaer an Aotrou.

SALM 148/ 3-4, 9-10, 11-12, 13:

Diskan: Meuleudi da viken
da Zoue, da Vestr ar bed ! (ton:Meulom oll...)

3-Meulit anezañ, heol ha loar,
meulit-hen, oll stered lugermuz !

4-Meulit anezañ, neñvou an neñvou
ha c'hwî, doureier a-uz d'an oablou.

9-Meneziou, hag oll runiou
gwez-frouez hag oll wez-sedrez !

10-Loened gouez hag oll loened doñv,
loened-stlej ha laboused-nij.

11-Rouaned an douar hag an oll boblou,
prinsed ha barnerien an douar !

12-Paotred yaouank ha merhed yaouank,
kozidi ha krennarded !

13-Ra veulint ano an Aotrou,
Rag da uhel-veuli ema e ano,
dreist an neñv hag an douar,
ema meurbed e Ano !

Alleluia, Alleluia...
Deuit pried ar Hrist
Resevit ar gurunenn,
e-neus an Aotrou preparet evidoh
a viskoaz. Alleluia !

MAZE 19/ 3-12:

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT VAZE:

3-Ar Farizianed a zeu da gaoud Jezuz, evid klask e luzia,
hag e lavaront dezañ:

"Daoust hag aotre e-neus ar gwaz da gas kuit
e wreg evid abeg pe abeg ?"

4-Jezuz a respont:

"Ha n'ho-peus c'hwi ket lennet e-neus Doue
krouet er penn-kenta, ar gwaz hag ar vaouez
ha lavaret dezo:

&

5- -Ablamour da gement-se , e kuitay ar gwaz e dad hag e
vamm,
evid beza d'e wreg;
hag e teuint da veza, o daou, eur horv hebken.

6-Evel-se ne'z int mui daou, med eur horv hebken.

Arabad eo d'an den dispartia a r pezh a zo bet unanet
gand Doue.

7-Lavared a reont dezañ:

"Perag e-neus Moizez roet urz
da rei eur paper a zigouvi
pa vez digouvi ar wreg?

8-Jezuz a respontas:

en abeg d'ar hriz m'eo ho kalonou
eo e-neus Moizez roet aotre deoh da zigouvi ho karragez.
Med er penn kenta, n'oa ket kont evel-se

9-Hen lavared a ran deoh:

ma teu da unan bennag digouvia e wreg,
nemed ha ren a rafe eur vuez fall,
ha dimezi gand unan all, a ra avoultrij."

10-An diskibien a lavaras dezañ:

"mar dema evel-se stad ar gwaz e keñver e wreg,
eo koulz chom heb dimezi."

11-Hag e respontas:

n'eo ket an oll a intent an dra-ze,
netra nemed ar re a zo bet roet dezo da intent.

12-Bez 'ez eus euniked hag a zo evelse

abaoue ma 'z eus anezo,
re all rag ma'z int bet rentet dihalloud gand an dud
re all hag a zo deuet da veza euniked euz o ferz o-unan
ablamour da rouantelez Doue.
Kompreno an neb a hell kompren !

LUKAZ 10/38-42:

Alleluia Alleluia

Yann 14/23

N'euz forz piou, ma kar ahanon, a viro homzou,
 neuze va zad a garo anezañ, dond a raim beteg ennañ.
 Alleluia.

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT LUKAZ (10/38-42)

38-En amzer-se, Jezuz, oh ober hent gand e Ebestel,
 a zo antreet en eur vorhadenn, hag eur vaouez, arvet Marta
 he-deus e zigemeret en he zi.

39-Béz 'he doa eur hoar arvet Mari,
 hag houmañ a jome da azaza eharz treid an Aotrou
 da zelaou e gomzou,

40-e-keid ma labourer Marta war dro an ti, prez warni,
 Chom a ra a zav hag e lavar:

"Aotrou, n'hoh ket chalet e lezfe va hoar ahanon va-unan da
 ober ar zervij ?

Lavarit dezi eta dond d'ar sikour ;"

41-"Marta, Marta," eme Jezuz dezi
 bervet out ha kalz tregaz a gemerez gand eur bern traou.
 N'eo ket kemend all, unan hebken.

42-Mari he-deus dibabet al lodenn wella ha ne vo ket lammet
 diganti.

MAZE 25/1-13:

Alleluia ! Alleluia !

(Luk.21/36)

Chomit eta war zihun, o pedi e peb amzer,
 evid beza e tad vad d'en em gaoud dirag Mab an Den.
 Alleluia.

pe:Chom fidel beteg ar maro, eme an Aotrou,
 hag e roin dit ar gurunenn a vuez !

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT VAZE:

1-Jezuz a gomze d'e ziskibien euz e zonedigez.
 Lavared a reas ar barabolenn-mañ:

--"Heñvel eo rouantelez an Neñvou

ouzh deg plah yaouank,

pedet d'eur préd-eured, a gemeras o lampeier,

evid mond da ziambroug an ozah nevez.

2-Pemp anezo a oa diboell ha pemp a oa fur.

3-Ar pemp diboell o doa kemeret lampeier,
 med heb kemeroud eoul.

4-Ar re fur a gemeras eoul e podou da heul o lampeier.

5-O veza ma talee an ozah nevez e teujont oll da voredi ha da gousked.

6-E-kreiz an noz e savas eun hopadenn:

-Setu an ozah nevez ! It er mēz d'e ziambroug !

7-Neuze e tihunas an oll blahed

-hag e preparjont o lampeier.

8-Ar re ziboell a lavaras d'ar re fur:

-Roit deom euz ho eoul,

rag ol lampeier a zo war-nez mervel.

9-Ar re fur a respontas:

-Ne vo ket awalh evidom hag evidoh-c'hwi,

it kentoh da brena evidoh da di ar marhadour.

10-Med, endra m'edont o vond da brena,
e tigouezas an ozah nevez.

Ar re a oa prest a yeas tre gantañ er zal-eured,
hag e oe serret an nor.

11-Diwezatoh eh erruas ivez ar plahed diboell
hag e lavarjont:

-Aotrou Aotrou ! digorit deom !

12-Med eñ a respontas:

-E gwirionez, me lavar deoh, n'hoh anavezan ket.

13-Beillit et... , rag n'ouzoh nag an eur nag an deiz.

" N'OM KEN NEMED LOENED "

En eur barrez a Vro-Gernev, eur paourkêz kouer a zo klav-mad en e benn-ti. An Aotrou Person a zeu d'e weled. N'eo ket ma ve eur kristen euz an dibab, ne vez wardro iliz ebet ha zoken eo troet krenn e venoz euz an iliz hag ar veleien. Med ar beleg a zo e vicher pardi, ha klask an dañvad dianket. Aliez ar hlañved hag ar zonz euz ar maro o tostaad a ra d'an den gweled sklêroh ennan e-unan. "Deom d'e weled" eme an Aotrou Perspni.

N'eo ket gwall galoneg an digemer, med ar person eo ar person hag an doujañs evid an dud a iliz n'eo ket maro e kalon an den. Konta a reont kaoz euz kant tra: euz ar wreg eet da anaon, euz ar vugale eet e kêr, euz al labour, an amzer a ra; kement 'zo red evid beza en êz an eil gand egile.

Ar hlañvour n'eo ket bet atao er stuziou m'ema bremañ e kenwer ar relijion. Nann, bet eo eur paotr yaouank renket ha fur, aketuz d'e zeveriou a gristen; eur wech dimezet eo bet mad euz e vreg hag e vugale. Eun devez e rankas e baotred mond da zervija; n'eo ket a labour dezo er vro hag ez int eet da Baris. Siwaz ! e Paris e teujont abred da goll o feiz ha gwasoh c'hoaz da lakaad o zad da goll ive e feiz gand ar hazetennou a gasent dezañ ha gand o homzou faeuz pe flemmuz a-eneb an iliz. Trei a reas kein krenn da gredennou e yaouankiz.

Bremañ ema o vond da vervel, her gouzoud a ra. N'e-neus rebech ebet da ober d'an Aotrou Person, pell ahano !

-"Marteze e vefeh kontant da govez ha da gomunia..." Dond a ra sonj dezañ euz an amzer ma'z ee beb sul da bedi ha da gana gand e amezeien hag e vignoned, eleh chom er gêr evel eur bleiz en e doull....

-"O, Aotrou Person, emezan, n'om nemed loened..." hag e santed e oa sammet e galon evel eur paourkez o vond da veuzi hag o klask spega e tu pe du.

-"N'eo ket gwir, eme an Aotrou Person, Ni 'zo tud bet krouet gand Doue evid beza eñruz er bed-mañ hag eñruz er bed all. Kredet az-peus gwechall e-neus kaset war an douar e vab, Jezuz Krist, deuet da vev e-touez an dud evid distkouez dezo hent at baradoz. Marvet eo evdom war ar groaz evid gwalhi on eneou louzet gand ar pehed. Euz da hortoz ema, me, person ar barrez, a lavar an dra-ze dit euz e berz..."

Sioul e chom ar hlañvour....berr eo warnañ. Ar beleg a bed evid e ene paour. A-benn ar fin, en eur grenn, an dour en e zaoulagad, ar hlañvour a lavar c'hoaz eur wech:

-"Aotrou Person, paour, n'om nemed loened." Hag e varvas evel-se, en dizesper.

Pebez torfed ! mouga e kalon an den paour-se ar pezh e-noa greet joa hag esperañs e vuez ! Paour euz madon ar bed-mañ, e-noa bet eur binvidigez kaerroh: ar feiz kristen, hag an tenzor-se a oa bet laeret digantañ.

Ni, kristenien, on-eus eur galonad dirag eur seurt taolenn ha koulskoude...

N'eus ket pell c'hoaz am-eus gwelet eun abaden war an T.V: "L'enfant sauvage". Goude ar film e oa bet diwar e benn eun diviz etre pemp den desket braz war an anevaled hag al lod a spered a zo bet roet dezo gand Doue. Kemm braz a zo koulskoude etre an elfennig a zo roet d'an anevaled ha skiant an den. Unan euz ar pemp a gredas lavared: "Marteze n'eo ket an den eun aneval evel ar re all." An oll a jomas mud...Evito ivez sperejou braz a dud war skiañchou ar bed, n'om nemed anevaled, anevaled digorroh o spered eged ar re all endro deom, med anevaled e-touez anevaled all ! Souezuz ha mantruz !

War eur gelaouenn vraz sizunieg e welen skrivet e lizerennou braz peseurt kompartamant kaoud dirag ar maro: "Le Néant ou l'Espérance"- Ni on-deus dibabet an esperañs.

.....Badezet e vo pe na vo ket ?

Eur beleg euz kêr a ya eun devez da overenna en eur japel war ar mēz war sikour an Aotrou Person. Ar harter a zo digristenet don ha n'eo ket enket an dud er japel !

Echu an overenn, setu ma teuer da houlenn digand ar beleg badezi eur krouadurig. Aotrou Person ar barrez n'e-neus tennet ano ebed a gement-se. Petra da ober ?

Gwelom, eme ar beleg outañ e-unan, ouz peseurt tud am-eus afer. War al leh ema an tad, ar vamm, ar paeron, ar vaeronez hag ar vamm-goz gand he hoñf ampezet.

Ha perag o-deus c'hoart e vefe badezet o bugel ? An tad hag ar vamm ne vezont wardro iliz ebed...

-Ar hiz a zo...an oll vugale a vez badezet er barrez...

-Med daoust ha c'hwi ho peus feiz ? Petra lavar deoh gouel Nedeleg ? hag ar Zul-Fask ? Ha Jezuz a welit aze stag ouz ar groaz ? Netra na lavar na tad na mamm... Nehet eo laketañ ar beleg...

Klask a ra c'hoaz dizelei eun elfenn a feiz kristen e goueled o halon...o fask kenta !...nann, n'eus netra ! Er stuziou-se ne gred ket dezhañ e hellfe badezi ar krouadur pa ne vo den ebed en ti da hada e spered ar bianig kredennou kenta ar feiz ha boazamanñchou ar vuez kristen.

Torret eo ar jadenn a stage ar krouadurig-se ouz ar rummadou ha rummadou a dud o-doa douget e ano en e'raog hag a grede e Jezuz-Krist hag en e Iliz; n'eus dirag ar beleg nemed eur mell torret, ar feiz ne dremenno ket.

-"Pa n'ho peus ket a feiz, eme ar beleg, n'hellan ket badezi ho krouadur." Mantret e chom an oll.

A greiz peb kreiz ar vamm goz a zav he mouez, lentig awalh.

-"Me a gred, emezi, me a gred e-neus Doue krouet peb tra hag a roio koll pe zigoll da beb-hini hervez ar vuez e-no renet. Me a gred e Jezuz-Krist, Mab da Zoue, maro war ar groaz evid or prena. Me a zesko e gatekiz d'ar bugel."

Ar beleg neuze da lavared d'ar vamm lakaad ar krouadur etre divreh ar vamm-goz. Hi eo a zo o houlenn ma vo badezet ar krouadur, hi a daolo evez warnañ.

Hag e oe badezet ar bugel. Feiz kristen ar rummadou koz a lamm d'ar mell torret, euz ar vamm-goz d'ar mab bian. Salv e vefe ar paotrig-se evel eur greskenn yah ha nerzuz, savet war ar hef koz, ha kreñv awalh evid rei lañs d'eur rummad nevez a gristenien.

oooooooooooo

Eun atant vraz war ar mêz, an ozah a zo eet gand Doue diwar eun darvoud: an trakteur bet tumpet warnañ e-neus e lazhet. Ar wreg, yaouank c'hoaz, a zo chomet heh-unan da zevel tri a vugale, eur verh eo ar gosa. Planedenn c'houero evid ar vaouez.

Med kaloneg eo an tamm anezi; gand ar zoñj euz he gwaz, e fell dezi kas da benn ar pezh o-doa divizet ober o daou asamblez; kas al labour endro ha sevel ar vugale: rei dezou deskadurezh evid m'hellfent ober o zreuz er bed-mañ hag ober anezo kristenien stard evel o zud.

Eur verh eo ar gosa; mond a ra mad er skol ha paka'ra he bachot heb kalz a boan. Chomet eo ivez aketuz d'he deveriou a gristen. Kontant eo ar vamm: pa'za mad ar hosa eur ar vugale, ar re all a ya êz da heul.

Bremañ ez 'a ar verh d'ar skol-veur peogwir eo speredeg a-walh hervez he mestrezed. Deuet eo mare Nedeleg hag ar bloaz nevez, ar verh a lavar eun devez d'he mamm, rog a-walh an tamm anezi, maetzze evid kuzed eo fromet he halon:

- "Mamm, ne'z'in ket mui d'an overenn". Du-ze, er skol-veur eo bet mesket gand skolidi all, gaoab a zo bet greet anezi ablamour d'he feiz kristen.

- "N'eus aze nemed sorhennou gwrañh koz ! poent eo deom-ni, yaouanki⁺ zou, terri on naskou ha kemer eun hent nevez..."

Tamm ha tamm eo en em zilet an douetañs en he spered, tamm n'eo ket hi eur plah diwarlerh ! gwelet e vo pa zeuio ar vakansou.

- "Mamm! ne z'in ket mui d'an overenn!!" Ar vamm baour a zo kouezet he meudig en he dorn.

- "Ma n'am-befe ket moustret warnon va unan, emezi, am+befe distaget eur gravanad ganti. A drugare Doue, n'on ket eet en egar. Deuet ennon va unan am-eus lavaret dezi: selaou, deuet out bremañ en oad da ren da vuez hervez da zoñj, med gouzoud a rez petra eo bet va buez abaoe maro da dad, pegement am-eus poaniet evid kas an atant endro evidoh, evid kaoud peadra d'ho sevel en ho renk, evel m'e-nefe karet da dad. N'eus ket manket nemeur a dra deoh. Mad m'am'eus gellet padoud hag harpa eo gand ar zoñj euz da dad, med dreist oll ablamour m'am-eus kavet em feiz kristen an nerz-kalon da jom heb fallgaloni ha da ober penn-da-benn va dever a vamm, hag a vamm gristen. Ar bedenn hag an overenn heuliet beb sul daoust d'al labour a zo bet nerz ha sklerijenn va buez....

Bremañ e ri hervez da zoñj..."

D'ar zul warlerh, ar plah a yeas d'an overenn evel a-raog ha ne jomas ket goull he hador en andred-se euz an iliz-parrez ma vo boaz he zud hag he zud-koz da zond da bedi abaoe rummadou o-doa douget heh ano en he'raog.

V.F.